

# CHANSON EUR C'HORN BRAS POPULOU,

## COMPOSET A NEVEZ

Gant eun den a Bleuueur-C'hautier, hanvet Yan AR MINOUS.

Tostet oll, a c'houi glêvou  
Doare eur c'horn bras populou,  
Populou zo eur pictol corn  
Brassoc'h wit eman zo em dorn.

Populou, voa bet fabriquet  
Bars eur guer vras deus en Naonet,  
Herveo rapport ar helloyou  
Eno voa crouet populou.

Populou zo eur c'horn estranch  
Hiroc'h e c'har ewit ma manch,  
Hac impli bepret en peb sun  
Ouspen parealat vutun.

Populou voa bet invantet  
Gant eur butuner obstinet.  
Pini na c'hoant gant populou  
Da ber c'hriilan tout e vadou.

Mont a rei da di eur fornier,  
Ma c'horn e mean zo dister,  
Ret vo invanti populou,  
Chef a roue en oll guerniou.

Eur fornier a voa debitant  
Hac a laras hep complimant,  
Min ya da c'hrean populou,  
Mès eur goñec d'ach a goustou.

A pe goust-fe trivoac'h diner,  
A laras neuze d'eur fornier,  
Min renco cad eur populou,  
Ewit ober cornedadou.

Chetu aze me ar fornier  
Eur c'horn ha na nequet dister,  
Henes a zo eur populou  
Hac a zo cre e ressortchou.

Gour a leret eman zo cre  
Quencouls a roc evel a dre.  
Ewit laret ar vouirione,  
Ar c'horn-man neuz capacite.

Memezant plijout ra din  
A c'han breman d'en cas ganu,  
A da bean anoc'h ractal,  
Chetu aze n'anter-real.

A c'han breman ma c'hamarad  
Gant populou da vutunad,  
Min rei breman eur c'hornedad,  
Hac a badou eur goël bennad.

Herveo testeni ar fornier  
A voa padet eun heur anter,  
Losquet a re moguet en er,  
Qen a voa embrumet tout quer.

Pourmen a re dre ar ruyou,  
A vutunad gant populou.  
Losquet a re eur vogueden  
A voa hanval ous eur vrumen.

An habitantet tro voar zro,  
Herveo rapport ar helloyou.  
A diredas deus o zie,  
Da voëlet an instrument-se.

Laret a rent ozac'h a groëg,  
Sel brassan corn a zo ne veg,  
Crisquin hep ret ra ar c'herniou  
Ari lingt brassech wit poëlou.

Gour a leret henes so bras  
Eun anter troatat so ne fas.  
A qnement-al a zo ne c'har  
Biscoas na moa goëlet e bar.

Coz a yaouanc tout a lerent  
Goëlet an den-se zo eur fent,  
Bean zo eur c'horn en e c'henou  
Capabl da boac'hat avalou.

Neuze lerent n'eil d'eguete ?  
Daost piou me eo an den-se.  
Neus fors piou e ouffe bean,  
Eur c'horn goëlet-vras a zo gantan.

Henes a zo en tremeniad  
Hac a blich dean butunad.  
Hac a neus choazet eur c'horn mad,  
Ewit ober eur c'hornedad.

Neuze lerent tout assembles  
Nequet deus hon rouanteles.  
Aenes renq bean deus an Afriq,  
Petramant deus an Ameriq.

Henes a me, zo deus a Franç,  
A neus arc'hant en abondanç.  
A neuz moyen da gonduin,  
Butun d'ar c'horn-se da derwin.

Ret e cridin me nefe moyen,  
Quement-se nequet eur fablen.  
Impossibl eo hep cat madou,  
Conduin c'horn vel populou.

Mes breman n'em retiromp tout,  
A lezomp-en da vont ne rout,  
Na glêr james elasq affer  
Spicial ous eur butuner.

Ar vutunerien quazi tout  
A zo franc da bean la gout.  
Henes a zo franc da bean  
Sort neuz hini bars er vro-man.

Neuze hejont tout voar e lere'h,  
Quencouls ar vam evel ar vere'h.  
Quencouls an tad evel ar mab  
Peb a vanac'h e da c'hoant cad.

Commanç rejont tout da redeç,  
A da c'haloupat vel quezec.  
A sonjal cat peb a lichen  
Ewit glebyan o c'horsalyen.

Heman pa voëlas en dud-se,  
O tiredec dre eur pave.  
A laras breman hon fichu,  
Entouret hon deus en daou-du.

Leret din mean bourc'higen ?  
Petra glesquet tout n'eur vanden.  
Min gred o'heus c'hoant d'em attaquin,  
Petramant d'em outragin.

Na glesquomp-quet o c'hataquin,  
Na memes me o c'houtragin,  
Ni na glesquomp en nep faëon,  
Netra aman nemert boesson.

Hervoë ma zo dimp rapportet.  
Gant unan deus on c'honsortet,  
A voac'h franc da bean la gout,  
Dre lec'h ma tremenee'h partout.

Henes mean zo n'em dromplet,  
A c'hui zo ive man credet.  
Penos a c'hon franc da bean,  
Boesson dre lec'h ma tremenan.

A vicho pean banae'hou,  
Pa vent gant ma c'hamaradou.  
Mes pa vent neur vro estranjour,  
Na c'houllanquet a güin treitour.

Ar güin-ardant bars er vro-man  
A lag en dud d'en nem gannan,  
Zur-on, mar me bet eur hannac'h  
Min raffe tra la la guenac'h.

Neuze lerent c'hui mē zo fort  
Sort neuz hini en Coste-Nord,  
Na gredjont a ve hini  
A capabl d'ho surpassi.

Nan, e mean neusquet unan  
A blegfe din ma bis bian,  
Quentoc'h a torfe ascorn  
Wit ve pleguet eur bis em dorn.

Neuze lerent tout a voës rust,  
C'hui me ma mignon zo robust?  
A contant oc'h da jachan bis,  
Mar goc'h contant, c'hui n'ho pomb bis.

Alo mean ma mignon demp,  
Nequet necesser diu cat pemp,  
Bac sonjal a ran gant unan  
M'ho tiflipo bras a bian.

Neuze commanschont da chassan,  
Mēs allas! tout a c'hent dreistan.  
Obliget a voa da losquel  
Pa na voa quet cap da derc'hel.

Neuze lerent, bian a bras  
Te na nout nemert eur c'hoif-bras,  
Gousecoude pa voas o criguin  
A leres voas cap don broëin.

Mēs breman mē a vo goëlet  
Pe hout e capabl, pe ne noutquet,  
Aroc ma vefomp separet  
Ma mignon te vo regalet.

Min o suppli breman Annet,  
Carolin, a neuze Jaquet,  
Da reïn dean voar e vizach,  
Car henes a goze sauvach.

Na c'houllanquet me Jaquetan  
Reïn dean ar flippat quantan.  
Pa gommeço Carolinan  
Neuze lamfomp on zaër dean.

Neuze commanças Carolin  
Da vouboual e zaboulin,  
Evel pa vije o c'himban,  
Min ma mignon zo clasq chican.

Lar dïn breman mez ma mignon,  
A te intend pean boësson.  
Mar queres pean dimp efach,  
Na seofomp-quet voar da vizach.

C'houi mean zo tout diraison  
Mar cred guenac'h on caouion  
Da fornissant boësson d'evan  
Da quement d'en a zo aman.

Neuze crijont assembles tout,  
Red a vo dimp mē caët la gout,  
Petramant gant tollio dorn,  
A vrisfomp'anout a da gora.

Heman pa glevas o c'homzo  
A gommeças gant populo,  
Gant populo eur c'horn zovach  
Da reïn dé tout dreuz-o bizach.

Alo, e mean populo  
Chef a roue an oll guerno,  
Groa breman aman da dever  
Mar gout charitabl em c'henver.

Neuze commanças populo  
C'hervoë rapport ar c'helloyo,  
Da reïn de tout dreus o gueno  
Quen a losqueïn criadenno.

Crial a reïn a voez huel  
Reit dimp a mē plaç da dec'hel,  
Pe c'heomp da vean brizet  
Gant roue ar populonet.

Aze e mean a chomfet  
Pe oc'h contant pe na noe'h quet,  
Aroc ma c'heffet a lesse,  
A c'houffet pardon ous Doue.

Neuze c'hejont tout d'an daoulin  
Dirac ar Vajeste Divin.  
Ewit pidin anean en graç  
D'apezin coler ar c'horn bras.

Neuze finissas populo  
Hac a baquas e flaüto.  
A ractal c'hez da vutunat  
En geno bras e ganmarat.

Mēs eur butuner obstinet  
A nefoa cals a vignonet,  
A tout a vrischont o c'hernio  
Ewit prenann eur populo.

Neuze voa bet etablisset  
Ar c'hernio bras populonet.  
Gant a rezco a vutuner  
Queneouls er mēs evel en quer.

Implian reont en peb sun  
Eur som enorm deus a vutun.  
Naonte goënegat hac ouспен  
Pareal bars en arc'hant goën.

Goëlet a rer servicherien,  
Artizanet, ouvrierien.  
A vutunat gant populo  
Quen a ve rouzet o baro.

Ar zon-man neuz ewit auteur  
Eun den deus a Bleuveur-C'hanteur.  
Pihini hanvet en peb canton,  
Yan ar Minous ar poët breton.